

(480, suite)

Alouzo hac Himogina,
Pe Rolland hac Izabel.

Var an ton gallec.

(481)

Red eo, a lavare goechal
Rolland d'e vreg yaouanq Izabel;
Red eo: me a rang partial
Erit mont d'ar Turki d'ar brezel.
Goela 'res evidon brema.
Ha caon a res din var ar menou:
Un all, abars nebeut amä
A zewi da zizec'ha da zaelou.

Ne get possibl dit e rangen
En eur voela, eme Izabel:
Did e vezin da virvigen,
Hac e vez maro, bepret fidel.
Mar teufen da ancounac'hat
An hini a meus qement caret,
Ra deu dirac va daoulagad,
Gerqent da reproch din va fec'het.

(482)

Mar demezän, deiz va eured
En banqet, en c'hichen azeet,
Deus da gass ac'hanon d'ar bez,
En eur laret e voan da bried.
Rolland a voe lazet, siouas,
Izabel a ra caon, a galoen;
Na voa get achu mad ar bloas,
Na zeuas eur marqis d'e goulen.

E renq, e sqiant, e arc'hant,
A dallas calon an intanvez;
Rei a ra he c'honsantamant,
Hac assinet e zec an devez.

Ar c'herent a zo assamblat,
 Ar banquet a gommang prest soudan;
 Mes ne voaint get c'hoas arzet,
 Un officer zo en he c'hichen.

Spontus e voa, ha bras meurbed,
 Hac, ousten ze, quisget en houarn,
 Hac er quis-se voa goloet
 Gercouls e vizach vel e zaouarn.
 Na grede den sellet e fas,
 Gouscoude e voa c'hoant d'e velet;
 Mes en, hep finval deus e blas,
 Aus Izabel a zelle parflet.

Ar vreg yaouanq oll seberet
 A lavar dezän, en eur griena:
 « Lammit ho casgen, me ho ped,
 » Hac arzet ganeomp da leina.. »
 Mes p'en devoe e gasq lammiet,
 Pebes spectacl spontus ha c'huero !!!.....
 Scrijal a ras tud an eured,
 Pa veljont bizach un den maro.

(483)

En e za plom, ar geant cris
 Eus Izabel a c'hoarze cruel:
 « Sell, emezän, sell ouzin pis.....
 » Me zo Rolland, lazet er brezol.
 » Din e pou prometët goechal,
 » Ma mar chancefe ganen mervel,
 » Bigen na quemerjes un all,
 » Mes din e vizes chommet fidel.. »

« Mar demezän, deiz va eured
 » Er banquet em c'hichen arzet
 » Deus da gass ac'hanon d'ar bez
 » En eur laret e voan da bried.. »
 « Tud gentil, ja voan en buez,
 » Horan a zo bet va demezel.....
 » Deus alesse ganen d'ar bez:
 » Da boent zo deut: te a reuq mervel.. »

Hasten a ra un dorn pounnar ;
 Caer he doa crial ha deplori,
 O longa a ras an douar,
 Ha c'hoas o c'hêvet o hirvoudi.
 Ar marquis a voa qer mantret,
 Ma renkas souden goude mervel ;
 Abaoue den n'en deus credet
 Ober o demourañ er c'hastel .

(485)

Izabel a deu di bep bloas,
 Guisget evel evit eurenji,
 O crial atao goas ous goas,
 An teuz na ziscroq qet anezji .
 Ma rancfe an intanvezet
 Hirio an deiz caout ur seurt c'hoari,
 Meur a zen maro a velfet
 O tont da ober charivari .

(Vol. II, p. 480-485.)
 10 str. numérotées.